

KANTIK SANT ABIBON



8N2-2-083

Leuhan

Ton : Bosen Elliant, pe : Rumengol.

DISKAN :

*Sant Abibon, sant galloudus,
Klevit hor peden hirvoudus :
Hon diouallit hed hor buhe
Dious pep darvoud, pep fallente.*

I

Enoret, karet a bell zo,
Vel unan eus sent kos hor bro,
Sant Abibon d'an dud er boan
A ro nerz-kaloun e Leuhan.

II

Sant Abibon pa vez pedet,
Kreis an danjer, kreis ar hlenved,
A zo goest d'ober burzudou
Evit skanvaat pouez hor Hroaziou.

III

Sant Abibon a berz Jesus
En deus er c'halloud souezus
Da drehi poaniou ar hlanvour
A zeu da c'houlen e zikour.

IV

Niverus eo an trubulliou ;
En draonien-man leun a zaelou,
En anken a wask hor halon,
Pedomp ato sant Abibon.

V

O ! Diouallit korf hag ene
Eneb pep drouk hor bugale,
Ha grit ma kreskint e furnez
Evit guella brud ar barrez.

VI

O ! Diouallit hon tud yaouank
Diouz an danjer da ruill er fank,
Ha grit ma vezint aketus
Da vale var roudou Jesus.

VII

Bennigit poan al labourer,
Brevet e gorf en e vicher.
Diouz pep gualeur mirit hon tud,
Hor parkeier, hor loenet mut.

VIII

Grit ma chomimp ato fidel
Da Jesus-Krist, d'e Vam Zantel ;
Gant ho zikour, biken Satan
Ne hello trehi tud Leuhan.

IX

Ha pa vezimp en angoni,
Pellañt ouzomp pep melkoni.
Lakit fians en hor speret
E kavimp bro an eurusted.

X

Ha ma vo red d'ar purkator
Mont da gempen hon ene lor,
Sant Abibon, hastit buhan
Lakat fin d'ar prisoun a dan !

Imprimatur :

Kemper, 10 Gouere 1934.

P. MESSENGER, Vikel bras.